

SON AR BREZEL

Etre Russet hag Japonet

Didosted kenvroidi, holl dud a Vreiz-Izell,
Da zelaou eur zon nevez a zo gret d'ar brezel
D'ar voserez heb hano, d'an distruj milliget
Zo c'hirio tre ar Russet hag tre ar Japonet.

Tud a skiant gant truez o velet ar poanniou
Hag ar vizer zo bepred da c'heul ar brezellou,
En deuz bet c'hoant da viret dre ziviz ar La Hay
Na zigouezo ken biken ar zeurt lazerez-se.

Ho c'hoant e oa da lakat eur peoc'h baduz da ren
Etre peb rouantelez evel etre peb den ;
Mez ho zonz e oa re gaer vit beza komprenet
Hag ho c'homzou kalz re fur vit beza selaouet.

Rag abaoe'spen bloas-so ne glever ken bemdez
Nemet komz euz a vadou hag a lazerez,
Lec'h ma kouez ar zoudardet skubet a villerou,
Koulz var zour hag var zouar digant ar bolodou !

Eun druvez hag eun estlam eo klevet pegemen
A dud ho deuz ben brema kollet ho zam kroc'hen,
C'hoaz n'ouzer met eun anter demeuz ar virionez
Gant pebrum o klask kuza arc'hollou gretn'ho zouez

Mez abred pe zivezad ar guir a zeu bepred
Kaer a ve klask he guza da veza anavet
Hag velse bep eun tammik, evit deomp beza pell.
Ni glev ar pezh a dremen var dachen ar brezel.

Emgann ar Cha-Ho

Enno e oa bet siouaz etre an diou arme,
Tre an eiz hag an ugent devez a vize here,
Eun emgann demeuz ar scurt ne oa biskoaz guelec
Nag enno, nag elec'h all ebarz brezel c'bet.

Sonjet penoz oa enno an eil dirag eben
Diou arme e peb hini ouспен tri c'hant mil den ;
Seiz kant mil en eur blokad, lavarer oa an he
Gant pemzek hant pezh kanol o tenna noz ha de.

Euz a bep tu d'ar blenen, var bord ster ar Cha-Ho,
Ne veler met soudardet tispak deuz tro var dro,
O tiredek d'an emgann, vel tuchennou merrien,
O lammat hag o saillat vor ho enebourien.

Ar menezioù a grene digant trouz an tennou
Evel pa vijen bet holl o strinka a beziou ;
Ar bolodou n'em groaze dre holl evel grizil
N'eur dreuzi ar zoudardet dre gant ha dre gant mil !

Russet evel Japonet n'em laze, n'em zraille
Vel da vleizi kounaret an eil euz hegile
Tre ma goueze eur rumad, eur rumad all zeuaz
Evit trehi pe vervel ebarz ar memez plas !

Avechou vije siouaz, tre an enebourien,
Emgannadek, korf euz korf, digant en armou guen
Hag neuz vije guelec n'eur c'hemesk heb hano
Ar re vev o n'em zrailla var c'hor ar re varo !

Hag dre holl deuz kreiz an tan hag diskrab ar brezel,
Klemmou ha galvadennou truezuz o sevel,
Klemmou ha galvadennou ar soudardet vlesset
O c'houlen sikour d'ho foan, pe beza peur lazet !

Mez kemen hini glaske monet betek enho
Vije raktal diskaret ha laket vel dezho
Divempret ha dispennet gant ar barajou tan
Pere skube ar blenen heb distag nag chan !

Pa echuas an emgam d'an trizekvet devez
Siouaz nag pebeuz anken ! pebeuz tristedigez !
Velet ar c'horfou maro ken stang var an douar,
Evel da edou guenan mouget vit kaout ho c'hoar !

Kement e oa anezho siouaz ken n'eller ket
Ho lakat holl en douar evel me oa glect
Hag elec'h ho interri e oa red ho berna
Hag c'houeza tan dindan-ho evit ho distruja !

Emgann Moukden

Pemp miz varlerc'h an dra-ma goude beza kresket
Peb hini c'hoaz eun anter niver he zoudardet
Hi n'em gavaz adare krog e kichen Moukden
Gant an euzuza peget oa guelec betek hen.

Ar Russet kalz neubeutoc'h n'em gavaz ar vech-ma
Tapet gant ar Japonet pa zonjen neubeuta,
Klozet euz a beb kostez e kreiz eur c'helc'h a dan
Vel ma oa Fransisien guechal ebarz Sedan.

Ne oan ket evit tec'hel nag mont e tu ebed,
A nez digerri eun hent dre vesk ar Japonet,
Pere gant ho fuzuliou ha gant ho c'hanoliou
Ho goleaz holl dindan eur glao a volodou !

Andarn vuya gouskoude c'hellaz c'hoaz en emdenn
Neur zaillad dre greiz an tan var ho adversourien ;
Mez an emgann-ma siouaz, a goustaz d'ar Russet
C'huec'hugent mil den demez ho guella soudardet !

Hon deuz goude met sonjal en holl gombajou-zo
Bet etre an diou arme abaoe Chemulpo,
Evit guelec pegement a dud ho deuz kollet
Ho buez bar ar brezel en amzer dremenet.

Deuz a vordou ar Yalou betek re ar Cha-Ho
A lakeer zo lazec kant mil Russ pe var dro,
Eur c'hant mil all pe vuioe'h tro var dro da Voukden
A ra deomp en eur strollad ouспен daou c'hant mil den.

C'hoaz na gonter ket n'ho zouez ar re a zo kouezet
Tro var dro da Borz-Arthur koulz lazec ha beuzec,
Nag ar re en deuz renket mervel hed an hentec
Trehet gant ar baourente ha gant ar c'hlenvejou.

Kredi a c'heller ivez penoz deuz an tu all
Ar Japonet deuz kollet demdost d'eur c'hement all,
Pez a ra ar gont spoutuz a bevar c'hant mil den ;
Siouaz na pebeuz distruj ! na pebeuz planeden !

Pevar c'hant mil den lazec sonjet mad kemen-se !
Hag vit pe seurt digarez siouaz lavar din-me ;
Daoust hag hen an dud kez-se dijen ket kavet guel
Chom er ger da labourat vit mont di da vervel ?

Daoust hag int doa goulennet beza dispartiet
Unan gant he dad he vam, eun all gant he bried,
Re all gant ho bugale en despet d'ho daelou
Vit beza kaset a bell da gaout bep seurt poaniou.

Daoust hag int ni a glaske mont er mez euz ho bro
Evit klask tag hag affer euz tud evel dezho,
Hag pere evel dezho siouaz ne c'houlennet
Met beva gant-ho e peoc'h vel guir amezeien.

Hag gouskoude tra euzuz hag ankeniuz meurbet !
Nag a voad, nag a zaclou zo ben brema skuillet,
Nag a boan, nag chlac'har, nag a dristidigez
A zo c'hirio e peb ti en diou rouantelez !

O brezel emgann diroll, boserez milliget !
Rag vi barnet hag d'ho c'heul ar re deuz ho laket ;
Rag e vi holl a viskoaz taolet mez ar broyou
Ha kondaonnet da viken digant an holl voblou.

H. P.

(Tous droits réservés.)

*Er memes ti a gaver va zoniou all : Son ar Meliner yaouank, Klemmou ar Bennerez, Son Nevez ann Den
Yaouank d'he Vestrez, Ar Guir Garantec, Guerz Vacher, Guerz Malavoi, Guerz Caër, Guerz Distruj Lagoubran,
Son Tinik Troc'h-Yale'h, Son Ren ar Veren, an Daou Vignon braz, ar Butun Marmouz, Beza Mezo, hag
Son Mouez eur Galoun Vrevet, (eur zon trao da gana evit ann dud yaouank.)*

*Heb dale vezo imprimet diou zon nevez all : Son ar Plac'h Yaouank Koz, hag Son Yann Beg-Ribot, diou
zon hag a rei d'an dud c'hoarzin.*

Guerz Tann Goall Paris hog guerz ar Martinik, ne vezint mui imprimet nemet goulennet a vez kalz anezho.

H. P.